



Unvaniezh ar Gelennerion Brezhoneg
Kemennadenn 17/01/08

Goulenn a ra Kuzul Akademek ar Yezhoù Rannvro ma vo adskrivet ar programmoù kelenn ar yezhoù rannvro er skol gentañ

D'ar 15^{et} a viz Genver e oa bet votet gant Kuzul Akademek ar Yezhoù Rannvro ur mennad o c'houlenn ma vo adskrivet ar programmoù kelenn ar yezhoù rannvro er skol gentañ e-barzh div destenn difer : an eil war-benn programmoù kelenn astennidik ar yezhoù rannvro hag heben war-benn programmoù kelenn ar yezhoù rannvro en hentadoù divyezhek : pal ar re-se zo kas ar skolidi war-du un divyezhegezh kevatal e fin ar skoliata kentañ.

Sell aze ur gammed war-raok. Addegas a reomp d'ho soñj penaos eo harpet ar goulenn-mañ gant an dilennidi-mañ bepred : Jean-Yves Le Drian, prezidant kuzul rannvro Breizh, Jean-Pierre Thomin, dileuriad e karg deus ar politikerezh yezh en kuzul rannvro Breizh, peotramant c'hoazh, André Le Gac, dileuriad e karg deus ar brezhoneg en kuzul-meur Penn-ar-Bed... gant yezhoniourion evel Gilbert Dalgalian, ha lies skolveuridi ivez. Ur sinadeg zo bet kaset gant intrudu UGB, Diwan, Dihun ha Div Yezh en miz Kerzu 2007 : 1700 sinadur zo bet dindan miz.

Gallout a rit mont da glask hiroc'h amañ :

http://www.ugbrezhoneg.com//skridgoulenn//index.php?petition=3&pour_voir=oui

Addegas a reomp da soñj penaos ar programmoù zo kinniget dimp evit bremañ a lak da bal tapet betek live A2 Stern Dave Boutin Europa evit ar Yezhoù en dibenn ar CM2. Hennezh zo ul live gwall izel ha n'a ket gant al live a vez tapet gant ar muiañ a skolidi en hentadoù divyezhek en Breizh. Gant-se eo lakaet en arvar-bras diorren ar brezhoneg dre ar skol.

Neuze e c'halvomp an holl dud nec'het gant dazont ar brezhoneg da sinañ ar goulenn-skrid-mañ : <http://www.ugbrezhoneg.com/skrid01.html>

Gwenole Larvol, Prezidant UGB